

AP
CHAL
POT

LEURRIAD

#22

BANNOÙ-TRESE
HA C'HOARIOÙ !




KAZETENN VIZIEK - HERE 2004 - 5 €

Lol 2004

LOL • NICOBY • MINGUEZ • AURELIEN.H • LE TREUST
TUDU • CHOUIN • BALAN • MALO • MORVAN • SANGLA • LEDORVEN

www.broleon-elagage.com




bro leon elagage

BREST - 02 98 28 15 81 - CONTACT@BROLEON-ELAGAGE.COM

QualiPaysage

diplometañ perngesoù • diskourrañ ha pliat diaes • diharzañ • labourioù e fakadoù greberek • labourioù diaes tostaat outo

Embargerzh admet E141



DE PROFUNDIS

Rémi SALOMÉ ~ Jean-Marie MINGUEZ



PENDEKTEZ SOUDE E YAKOMPRENEN AR BRAZ EUS AR SKRID.

"Breinet eo hor rouantelezh gant ur c'hleñved diouedic. Ur mallozh... Bep a dammig e troe pep gnaz, pep maouez da leon hudur...



An aner e klaskas hor gouezien vrasañ ur remed. Ha familh ar Roue d'ober he soñj da zivrañ a-roak ma vefe tizhet diskennidi diwezhañ ar ouenn gant ar c'hleñved. Hag Atlantis da loc'hañ kuit war-za ar c'hornog.



Douarañ a rejomp war un enezennig divriad. Suwazh, skrivet e oa bet diwezhañ domani an Atlantis gant an doueed. Hor c'hleñved hor boa stlejet d'hon heul en tu all d'ar morioù.



Setu me an hini diwezhañ outo hag ervu eo. Setu ma fell din fizioñ an nebeud patchoù-mañ d'an Atlantis ha da Roue ar Neuvorioù, oc'h esperout e talvezint da stourm ouz'h an droug."



FALLAENNO: A ZIJE DIN. HOLL ISTOR AN DENELEZH A OA FAOS HERVEZ AN DIELOU-MAR.



BETEK-HENN E LAKAER APRISA DA SAVELL AN DENELEZH. HA NE OA EUS AR MARMOUZED SPREDEK KENTAN NEMET DISEKENNIDI ATLANTIS DISLIBREK.

DIJ!
BAON!
BAON!



E TE P PETRA 'PEUS GRAET DIN P?



WEASEL P? MET PETRA P?



MET PETRA A
OA ER YAG
VREIN-SE ?

SATANAZET E BEBLANTE
WEAREZ BEZAR. EVEL UN LOEN
EN EM ZISPAKE, ENNAR UN
NERTH DALL. GOUEZ, FELLS !

E-KREIZ AN
TOURMACH, E KLEREKE
NISE LAKAT E ZORN
WAR UN ARM.



UN ELDHIL ! PEUS
GRAT OUDHIN ! OSER
A RIN DA STAL !

ARRGGH!

AN AER DALCHET
EN ARCH...

... KONTAMMET.

ME VEZ...

EN EM LEDAR A
RAIO AN DROUS...

BEZ E
RANKAN...

OSER UN
DRA BENNAK

TOURELL AR FALTAZI

Ma, dit-te ar blijadus dre ma 'zout nevez er vro !

Hia lâz dezhañ reñ ar plad en-dro, an taol-mañ !

K-dreñv an nor emañ-eh, kerzh !


Getu e roved...

...gant ma tijskenno !

AAAAAAA
Arabat disañjal ar plad. E ! E !



NEVEZ
2004




Toutes les cultures de Bretagne - Un livre de 368 pages, 18 X 24 cm, relié, cartonné, impression en bichrome, nombreuses illustrations. 29 €



- * de bretagne et d'ailleurs, regards d'historiens - Livre + CD audio, 35 €
- * Gouren, traditions de lutte en Bretagne - Mael Yann Kerlaon, 11 €
- * Généalogie par l'exemple. Dix générations de paysans bretons - Albert Laou, 19 €
- * Pennduig ma c'hazhez - Henni ar Borgn, Nouvelles en breton, 6 €
- * Corsaires ! Guerre de course en Léon, 1689-1815 - Jean-Pierre Hirrien, 22 €
- * L'argot des nomades en Basse-Bretagne - Narcisse Quellen, Bilingue, 6 €
- * Bourlingueur - Jean Breurec - Christian Le Meur, 19 €

Komzoù YAOUANK



- ARV:** KEROUANTON
- AR Bihan:** Anjelina
- 02:18 vloaz**
- Al liv a blij lezh:** Glaz
- Ar waster:** forêt noire gant ananaz
- Ar sport:** Kiwi
- Ar wech:** Miosotis
- Al lezh:** Kazh
- Al lev:** "J'étais sa petite princesse" gant Nelly
- Ar eur:** 2 eur goude lein
- Ar miz:** Mae
- Ar sportourien:** Elena Gomez ha Dimitri Karbanenko



Meuriad : Ur sport diaes eo ar "jim", n'eo ket?

Ya, ur sport diaes eo ma fell d'unan bennak tizhout ul live uhel. Eurvezhioù ez eo ret tremen d'ober atav ar memes jestroù, a-wechoù, evit dont a benn d'ober un dra bennak. Ar c'horf a vez lakaet da labourat kalz, hep menegiñ ar gwalzarvoudoù hag a choarvez ganeomp alies.

M. : Daoust ha n'eo ket ur sport a-enep natur, e-lec'h ma vez lakaet ar c'horf da c'houzañv?

E pep sport e vez lakaet ar c'horf da c'houzañv! Evel-just e vez lakaet ar c'horf da c'houzañv muioc'h pe nebeutoch hervez ar sport a zibabit. Hag ar jim a zo unan eus ar sportoù e-lec'h ma vez lakaet anezhañ da c'houzañv ar muiañ met e-giz-se-mañ. Ne gred ket din e vefe a-enep-natur evit se. Ur sport evel ar re all eo.

M. : Peder lodenn a zo: leure, treust, barenn ha marc'h. Peseurt rann a blij deoc'h ar muiañ?

Ar varenn eo a blij din ar muiañ, rak al lodenn diaesañ eo, hag an hini am eus aon outi. Al lodenn vravañ eo evidon. Diaes-kenañ eo tizhout ul live uhel er rann-se. Neuze e kemeran al lodenn-se evel ur pal da dizhout, ar pezh a blij din kalz.

M. : Peseurt perzh a ranker kaout evit gellout mont pell gant ar sport-se? Nerzh, gwevnder, kempouez?...

Sur eo ez eo an nerzh unan eus perzhioù pouezusañ evit gellout mont pell

er jim met n'eo ar perzh nemetañ. Ar gwevnder a zo a bouez hez, siar ar eo. Met desket e vez bezan gwevder dre forzh ober jim. Ar c'hempouez ivez, evit gellout chom a-sav war an treust, met ivez, ar resider. N'eo ket tout dont a-benn d'ober un jestr bennak, ret eo gouzout ober anezhañ en un doare teknikel resis, evit ma vije dire-bech.

M. : Penaos oc'h deuet d'ar jim?

Iskis eo rak n'eo ket ouzhin eo deuet ar choant d'ober jim pa oan bihan. Den ebet eus va familh na anavez ar sport-se. Ouzhpenn e vevan war ar maez. Neuze n'anavezen ket ar c'hlu-boù hag a oa tro-dro d'am zi. Ober a raen dañs e Landi pa oan bihan, hag un deiz, e oan oc'h ober jim war ar geot er skol, evel m'eo bet c'hoarvezet ur wech bennak gant an holl verched yaouank. Keginerez ar skol he deus gwelet achanon. He merc'h a rae jim e Landi. Goulennet he deus diganin ha digant ma mamm ma n'em boa ket choant ober jim. Met re ziweshat e oa rak 8 vloaz e oan dija ha ret eo gortoz daou vloaz goude bezañ bet enskrivet evit kaout ur plas ha mont er c'hlub. Bezañ dek vloaz a oa kalz re ziweshat evit kregiñ ar jim. Neuze he deus goulennet digant ma mamm kas achanon da ziskouez d'ar gelennerez ar pezh e oan gouest d'ober memestra. Aet on, hag ar gelennerez he deus lavaret din e oa a-du evit degemer achanon en distro-skol o tont.

M. : Morse n'ho peus bet c'hoant chom a-sav?

... Er sport-se ne baouezer morse da zeskiñ traoù nevez.

MORSE !!! Just a-walc'h. Atav em eus c'hoant kaout muioc'h a gentelioù. Met bremañ, nebeutoch, gwir eo. A-raok, pa oan er skolaj, ne gaven ket va c'horf gant ar 6 eurvezh hanter am ober a-raok, kaer m'boa labourat. Ur sauto a-dreñv diaes eo. Ar c'horf a rank chom sonn. Ha d'ar salto e vez ret ouzhpennan un dro warnon vanan. Diaes eo displegañ. A-hend-all, war an treust, em eus ouzhpennet ul lamm. Ul lamm diaes a-walc'h eo, met dreist-holl, unan hag a ra aon. Al lamm "carpe" a vez graet outañ. Ul lamm eo hag a ranker ober o sevel an divesker uheloc'h eget an "horizontale", en ur zerchel anezho digor. A-hend all, eo dreist-holl e gwevnder, fiziñs hag e resider eo em eus gounezet.

M. : Yaouank eo ar merc'hed a ra ar sport-se, peurvutañ. Betek peur emao'h e soñj kenderc'hel?

Kenderc'hel a rin ar muiañ ha ma c'hellin. Non ket e soñj pouez a-benn nebeut. N'on nemet 18 vloaz, gellout a ran kenderc'hel ur pennadig c'hoazh. Peurvutañ e pouez ar merc'hed tro 22, 23 vloaz. Met, ma c'hellan, e kendalc'hin c'hoazh. Ar c'hensrivadegoù a baouezin ganto abretoc'h, sur, met va c'hellennerez a chello kantañ warnon m'he deus ezhomm eus ur jimnerez. Prest e vin da adkregiñ gant ar c'hensrivadegoù.

M. : Dont a rit a-benn da gas ho studioù war-raok e-ser ober sport. Penaos e rit?

Gwir eo ez eo diaes din merañ va amzer, ar jim hag al labour met n'eo nemet abaoe ar bloaz-mañ. A-raok, n'em boa ket santet an diaesamant met ar bloaz-mañ ez eo dishevel gant ar bacho da bleustrin. Neuze, e klasikan ober eus ar gwellañ. Jim am eus diouzhu d'ar gwener da noz betek nav eur. Diaes eo ar gentel-se dre ma vezan skuizh eus va sizhun el lise. Ar Sadorn vintin e rankan sevel evit mont d'ar gentel c'hoazh met betek div eur hanter nemetken. Neuze e kavan amzer d'ar Sadorn goude lein evit labourat. D'ar Sul, pam eus kenstrivadegoù ez eo diaes din labourat, dreist-holl p'emañ pell a-walc'h ar genstrivadeg. A-hend all, e labouran d'ar Sul. Skuizhus eo met ne c'hellan ket klemm re dre m'eo un diviz kemeret ganin. Ne

vijen ket laouenoc'h o kaout muioc'h a amzer evit diskuizhañ ha labourat ma pouezfen gant ar jim. Er c'hortol.

M. : Petra oc'h gouest d'ober ar bloaz-mañ ha ne oac'h ket gouest d'ober ar bloaz paseet?

War al leure eo ez eo aet va live war-raok er bloaz-mañ, dreist-holl, dre ma teuan a-benn d'ober ar pezh "zo anvet ur "vrille". Ne oan ket gouest d'en ober a-raok, kaer m'boa labourat. Ur salto a-dreñv diaes eo. Ar c'horf a rank chom sonn. Ha d'ar salto e vez ret ouzhpennan un dro warnon vanan. Diaes eo displegañ. A-hend-all, war an treust, em eus ouzhpennet ul lamm. Ul lamm diaes a-walc'h eo, met dreist-holl, unan hag a ra aon. Al lamm "carpe" a vez graet outañ. Ul lamm eo hag a ranker ober o sevel an divesker uheloc'h eget an "horizontale", en ur zerchel anezho digor. A-hend all, eo dreist-holl e gwevnder, fiziñs hag e resider eo em eus gounezet.

M. : Petra a fell deoc'h deskiñ c'hoazh?

Kalz traoù. Er sport-se, ne baouezer morse da zeskiñ traoù nevez. N'ouzou ket resis ar pezh "m bije c'hoant deskiñ c'hoazh. Marteze deskiñ ober ar "vrille" met en a-raok ar wech-mañ.

M. : Ur sport eus ar c'hiz eo ar jim?



Ya, muioc'h-mui, memes ma n'eo ket ur sport anavezet mat c'hoazh. Emichañs e tevio de vezañ brudet rak ur sport plijus a dud a ra ar sport-se, met ne vez ket komzet kalz diwar e benn er mediaoù ! Setu perak e vez kredet n'emaiñ ket diouz ar c'hiz. Met ur sport dreist eo !

M. : Pegeit e c'hellit chom hep gourdoniñ, hag o terc'hel d'ho live memestra?

Kollet e vez buan a-walc'h al live, a-fed dalc'husted dreist-holl, met dont a ra en-dro ken buan all da c'houde. Met goude un nebeud kentelioù e teu en-dro. Pa baouezan muioc'h eget div sizhun e santan em eus diaesamantou. Met goude ur sizhun e vez adpaketañ an dale.

M. : Kelennerez sport e voc'h ur wech bennak?

Kelennerez on dija, abaoe pemp bloaz. Kelennerez on en va c'hlub. Lakaat a ran ar re vihan da c'hourdoniñ, ur wech ar sizhun, d'ar Sadorn vintin e-pad div eurvezh, hag heuliañ a ran anezho er c'hensrivadegoù.





WAR BORD AN HENT

2 baotr ha teir flac'h a zo o vevañ amañ, ul loen bihan gant pep hini anezho. Piv a gav bod e pep ti ?

- Ouzhpenn tri frenestr a zo war di Anjela.
- Nebeutoc'h evit pemp prenestr a zo war hini Laorañs.
- Unan eus ar baotred a zo sot gant ar baotred.
- 2 sifr a ya d'ober niverenn ti Anjela.
- En 13 ez eus ur plac'h ha 2 beroked o chom.
- Anjela a blij dezhi ar pesked.
- En 9 hag er 15 emañ Laorañs ha Fañch o chom.
- Mari ne blij ket dezhi an hamster.
- Unan eus amezeged Laorañs a sav lapined.
- Ines a zo amezeged ar paotr a blij dezhañ ar c'hizhier.



PEBEZH MICHER

War bep kartoñs, e lakai lieskementadennoù an daou sifr a zo dindan.



FOAR AL LEVRIOÙ

12 euro a vez gwerzhet pep bern levrioù. klask priz pep levr. al levrioù memes liv a vez gwerzhet d'an hevelep priz.



A-BLAEN :

1. Dispenn - 2. Begek / A lavar
3. Perzh ar pezh zo unvan
4. A-dreuz - 5. Stigell kenurzhiañ / Gwata
6. N'eo ket ar c'horf / Arme
7. Koultron / Danvez gwiennek bet nezet
8. Dareviñ / Tech

A-SONN :

1. Pesketa dluzhed - 2. Mestroniañ / Panevet
3. Metoù naturel / Bomm - 4. Stad diwezhañ an amprevan - 5. Niver a roer da labour ur skoliad - 6. Kemm-digemm - 7. Ardremez / Frouezh - 8. Nac'hadenn / Plijadur

Krouget gant Patrice MARQUAND

horus & thot

David Le Treust.



AL LANFRE

Tu zo dit tenniñ 15 boutailh, met taol evezh :

- war bep linenn eo dav leuskel 140 poent.
- war bep kolonenn eo dav leuskel 100 poent



Chans vat dit!



13

ROUDOÙ PAV

Dit da sevel gerioù 6 lizherenn oc'h ennañ heñvel

FAL	GLI	HAN
KRI ...	HAN ...	DAN ...
TOU	DOR	PAL
FEN	DIF	PIN
KIN ...	DIL ...	PEN ...
FES	BAG	PRE
EST	ROU	ESP
ESK ...	MOU ...	LET ...
DIE	FIB	PIK
DIS	KAR	GEO
KON ...	MAE ...	GRA ...
HAN	LOE	KOA

STERED-MOR

T B R A D
T R I E P R

en ur implijout lizherennoù ar c'hoari e rankez dizoleiñ ha plasñ c'hwec'h ger peder lizherenn

AR GER KUZH

e-tal pep ger ez eus ur sifr o reiñ da c'houzout pet lizherenn eus ar ger kuzh a zo en o flas.

P	L	A	S	T	R	1
A	L	A	M	A	N	0
B	A	G	E	A	L	0
A	M	E	Z	E	G	2
B	E	N	V	E	G	2
K	R	A	Z	E	R	2
B	A	N	N	I	G	0
N	E	P	E	L	L	0
K	A	N	N	A	N	0
K	L	U	D	E	R	1
K	A	R	R	E	Z	2
A	S	K	O	R	N	0
						6

OLIER & WAOU Pennoù-Kalet

HAG AN HINI KENTAÑ OC'H ECHUIÑ A LAKOAR POUBELENOÙ ER-MAEZ!!

EURVESHOU HAG EUREKHOÙ A CHEUAN PABOAT VEU-SE!

HA ME MEMEHO ALL... PABOAT A RABO MEUZE, TOARE!

A-BLAEN :

1. Pesk debradus - 2. Elum / Brageier
3. Stlejiñ / Straed - 4. Tra roet / Den a bae
5. Danjerus / Notenn sonerezh - 6. Korz
7. Sifr / Micher - 8. Lojeiz / Toull-bac'h
9. Adverb / Kellid - 10. Mestr / Loen

A-SONN :

- I. Den a blij dezhañ dastum al levrioù kozh
- II. Eneoù an dud varv / Notenne
- III. Stagell isurzhañ / Lakaat da vont kras
- IV. Kiañ - V. Torgenn. Stumm ar verb bezañ / Gwalenn houarn vegec da rostañ kig
- VI. Poan gorf lemm - VII. Stumm ar verb bezañ / Daoulinañ - VIII. Araogenn / Roue ar loened - IX. Kantik a veze kanet da Nedeleg / Straed X. Hanter null. Rouez / E-kreiz ar fas

Kinniget gant Patrice MARQUAND

AR MILENDAL

Loc'hañ a rez eus "ger" o klask ur c'hombod all, stag ouzh an hini kentañ gant ur c'hostez, ennañ ur ger disheñvel war-bouez ul lizherenn hepken Hag evel-se betek en em gavout gant "par" Arabat tremen morsa dre ar memes kombod.

sikour ar par da gavout e barez

GER	GED	GAD	PAD	PED	RED	ROD	POD
EOR	GOV	KAP	KAD	DEK	REV	LEV	SEV
TOR	TER	PER	LAN	MAN	LUN	RUN	SUN
BEV	TEV	LER	LOR	MOR	KOR	KUR	RAK
DAV	LEV	LED	LOM	MAT	TOR	ROK	TIK
DIV	HUD	HED	HET	LIK	TIN	TIR	BIR
AET	TAL	HAD	PET	LIP	FIN	FLUR	BAR
AER	PER	HEP	PEG	PIG	FIG	FAR	PAR

BEVET E BREZHONEG startijenn

Strolladoù sonerezh o seniñ er festoù-noz, ur bern a zo. Strolladoù tud yaouank, nebeutoch d'ya. Strolladoù brezhonegerien, an holl anezho... Unan a zo : **STARTIJENN !**



YOUENN ROUE

Abaoc'hpour eo krogel ar strollad Startijenn ha penaez?
Konogan : Abaoe 1997, er skolaj ar Heleg, gant mignoned a rae sonerezh. E penn kentañ e oamp meur a hini, o doa plijadur gant ar sonerezh breizhat.

Cheñchamantoù a zo bet er strollad abaoe ?

Konogan : An holl dud a oa ganeomp, un tamm evit c'hoarzhin nemetken, a zo aet kuit. Ha goude omp chomet, ni hon pevar. Bremañ, petra hon eus c'hoant ober ? Gwelet betek pelec'h omp gouest da vont...



YOUENN AN HARBAK

Tangi AG : Gwir eo omp boazet da vezañ ni hor pevar hag hon eus un doare da vezañ asambles. Ma vefe ur pempvet er strollad, aon hon eus ne gafe ket e blas. Er sonerezh, ha zoken er vuhez diavaez...

En em gavout a rit alies arambler ?

Tangi O : Me, gant Youenn, peogwir emañ o chom pemp kilometr eus e di. Setu ma welan anezhañ bemdez, kazimant. Konogan a vez gwelet alies, dre ma vez pleustret gant ar strollad. Kaer hon eus bezañ pell an eil d'egile a-wechoù, Konogan e Kemper, Tangi e Kreiz-Breizh, en em welomp alies-mat dre m'hon eus echu gant ar studioù kentañ, gant ar bak. Gouest omp da vont ha da zont, laosket ma vezomp gant hon tud. Setu ma tremenomp kalz muioch a amzer war ar sonerezh eget m'hon eus bet tro d'ober a-raok.



TANGI OILLO

Da lavarout eo pegent amzer ar sishun e tremenit rhu gant ho gitar ?

Tangi O : Se 'zo hervez. O paouez kaout ur gitar nevez emañ-me, da skouer. Setu ech implijan anezhi kalz. Met se zo dre mareadoù, e gwir. Bez e c'hell bezañ pemp, c'hwec'h eurvezh. Ha devezhioù all, un eurvezh nemetken.



YOUENN GALL

Petra eo bet ar mare plijusañ e buhez ar strollad ?

Tangi AG : Yaou ar Porzh e Brest, e miz Eost 2003.

Tangi O : " La nuit du Folk " e Kerlouan, en em gavout war al leurenn gant tud brudet e metoù sonerezh Breizh: Pennoù Skoulm, PSG, Guichen. Leun, leun a strolladoù ha ni 'oa aze, ivez, bugale 12-15 vloaz. Fier-ruz da vezañ war al leurenn.

Youenn : Evidon e teu ar strollad da vezañ plijusañ-plijusañ. Met ya, marteze, ar mare plijusañ e oa " Yaou ar Porzh " e Brest.

Konogan : Mareoù plijus a zo bet, pa oamp yaouank, pa 'z aimp da c'hoari e-lec'h ma oa leun a dud brudet. Ha bremañ... P'en em gavomp e gouelioù e-lec'h ma vezomp degemeret brav e-pad ar gouel, ha goude zoken, gant an eil, ha tout...

Denao e fardit ho tonioù ?

Tangi AG : Dre vras eo me a renk an tonioù, an " arrangements " e galleg... Ha goude ar c'houblad binuiou-bombard a adwel tout an tonioù. Ha ni, me ha Tangi, a glask mont d'eo heul.

Perzh pennañ ar strollad eo ar c'houblad, benn ar fin ?

Tangi O : Ket. Daou dra a zo. Al linenn seniñ, melodik, gant Konogan ha Youenn, hag al linenn heuliañ, ganin ha gant Tangi. Dre vras evel-just... Peogwir e kemer an akordeoñs perzh er melodi a-wechoù, ha me ivez. Hag a-wechoù a ra Konogan gant an uileann-pipe, evit heuliañ. Pa vez kemeret tonioù hengounel e vez klasket lakaat liv ar strollad warnañ...

Ha petra eo al liv " Startijenn " ?

Tangi AG : An doare da renkañ an ton.

Ouzh piv en em gavit tost ?

Tangi O : Beñ, just a-walc'h... Pa oamp yaouankoc'h e seloaoump kalz strolladoù Breizh. Ha bremañ... e seloaoump sonerezh a bep seurt: jazz, sonerezh iwerzhonat, kement hini a zo brav 'keñver lusk. N'eus ket tu da laret ouzh piv omp tost. Abaoe ur bloaz pe zaou hon eus kavet hon stil deomp-ni. Setu m'omp krog da vezañ laouen o seniñ hor sonerezh.

Perak en deus gallet ar strollad padout ken pell ? Petra eo " rekipe " Startijenn ?

Tangi AG : Mignoniezh

Konogan : Plijadur, da gentañ. Ha bremañ ar c'hoant d'ober gwelloc'h-gwellañ

Petra a vez kavet gant Startijenn ha ne vez



YOUNN GALL

Ket kavet gant tud all ?

Tangi O : Ar brezhoneg. Gwir eo 'zo kalz strolladoù o seniñ sonerezh Breizh met ne glevomp ket kalz a draoù war Breizh hag ar brezhoneg. N'int ket dedennet re gant ar yezh. Ha trist eo. Pa welomp anezho er festoù-noz, n'int ket chaket gant an dazont. Ne gompren ket emañ ar yezh war an diskar ha tout. Ha koulskoude, piv gwelloc'h evito, a zo plaset mat evit kompren an dra-se ?

Kanañ a rit e brezhoneg ?

Tangi O : Ne reomp ket. N'eus kaner ebet er strollad, da gentañ tout. Ha ni hon eus c'hoant d'ober sonerezh, kentoc'h.

Tangi AG : Pep hin en deus da labourat war e venveg sonerezh, ha kalz eo d'ja. Deskiñ kanañ ouzhpenn a vefe re... Kemer ur pempvet den, evit ar chan, ne blijfe ket deomp ober. Kinniget e vez an tonioù e brezhoneg hag e galleg. Setu ne laoskomp ket ar brezhoneg da gouezhañ.

Perak ne droit ket muioch ?

Youenn : Er goañv paseet e oa un abeg. Bez' e e oamp oc'h adsevel pep tra, o fardañ tonioù. En hañv-mañ hon eus bet tro da seniñ er festoù-noz met ivez e festivaloù: Gouelioù Meur Kerne, Brest 2004, Meurzhioù Ploueskad, Jazz et claquettes e Tregon. Deiziadoù 'zo da zont c'hoazh er goañv-mañ.

Tangi O : Gwir eo n'omp ket bet gwelet alies evit mont da seniñ e kornioù e-lec'h ma vez ar brasañ festoù-noz, e bro-Dreger hag e reter Breizh, setu perak e fell deomp embann ur bladenn a-benn diskouez hor sonerezh d'an holl.

Denao e vez kavet kevrened ?

Tangi AG : Ul lechienn Internet hon eus', hag a zo plijus-tre evit kaout titouroù diwar hor penn. Mod all e kasomp lizhiri e Breizh hag e Bro-C'hall. Respontoù hon eus, a-wechoù.

Kevezerezh a zo etre ar strolladoù ?

Tangi O : Daou ved a zo, e gwir. Hini an dud a-vicher hag hini an dud a-youl-vat. Daoust deomp tremen kalz amzer war ar sonerezh ne vevomp ket eus se. Pleustriñ ur wech ar sishun gant ar strollad mui eurvezhioù hag eurvezhioù pep hini en e gom. C'hoant hon eus ober eus ar sonerezh un dra pouezus en hor buhez. Ha ma c'helle dont da vezañ hor micher a vefe dreist, met start-kentañ eo bevañ eus e sonerezh hiziv an deiz, zoken evit ar brudetañ sonerien.

En embadenn a zo, e hed ar festoù-noz ?

Youenn : Marteze a-walc'h. Fin... E bro-Dreger hag e Kreiz-Breizh eo bev c'hoazh. E bro-Leon eo diaesoc'h...



YOUENN GALL

Petra a rontj eur ar prizon ebet e vez a-velho gant an dud a-vicher ?

Tangi O : An dud a-vicher a zo " intermittents ". Bez' o deus kargoù da baeañ ha tout... Dav eo gwelet ivez, pa bae an aozer 2006 d'ar soner, ne chomo nemet 100 en e chakod, ha c'hoazh e ranko prenañ binvioù gant se. Eus un tu all, ur strollad a-vicher a sach tud hag ober a ra an aozer aferioù ivez. Dav da hemañ gounit un tamm. Mod-all ne servij da netra. Dre vras, er mare-mañ, eo diskenet priz ar strolladoù a-vicher dre ma 'zo nebeutoch a dud o vont d'ar festoù-noz.

A bep seurt danzoù a vez kinniget er festoù-noz. Un dra fall eo ?

Konogan : Mennozh ar festoù-noz, e-unan, a zo un dra nevez. E-kreiz ar c'hantved diwezhañ, aze. Setu reizh eo e vefe kemeret tonioù eus a bep lec'h. Ar gevredigezh a ya war-raok. Setu ma 'gav eo mat e vefe eus ar meskaioù-se.

E pelec'h ho pje ehoant c'hoari ?

Konogan : E-lec'h ma vimp degemeret...

Tangi O : E lechiou mat, gant ur son mat.

Konogan : Degemer a reomp tout ar pezh a vez kinniget deomp. Araokadennoù hon eus d'ober c'hoazh a-raok bezañ gouest da gaut c'hoantou re vras.

Di lezh reuz ?

Tangi AG : An Eret Kozh, e Karaz.

Petra eo ho raktres brasañ ?

Tangi AG : Ober ur bladenn, d'ja. Ar c'hentañ bladenn. Ha, ma ya en-dro, un eil.

Tangi O : Leun a soñjoù 'zo. Tonioù 'zo prest. Setu 'benn bloaz, bloaz hanter...

Petra a vanñ deoc'h abaoe e Breizh evit labour ar strollad, da labour ?

Tangi AG : Produerien, tiez-embann...

Tangi O : Ha lakaat ur sistem war-sav, e doare un troer, da " werzhañ " ar strolladoù... Strolladoù rock, sonerezh iwerzhonat ha tud all c'hoazh o deus ur seurt sistem. N'eo ket aes bezañ soner, klask deiziadoù, leuniañ paperioù ha kement 'zo. Ma vefe graet tout al lodenn-mañ gant tud a-vicher e vefe aesoc'h deomp. Tu 'zo lakaat sonerezh Breizh da vezañ klevet e bro-C'hall pe pelloc'h...

E-pad pell e ve c'hoazh eur " Startijenn " war al leurenn ?

Konogan : E-keit ha m'en em glevimp, evel ma reomp bremañ, ya.

Startijenn, berr-ha-berr : ul lec'hienn: www.startijenn.com evit selaou o sonerezh (MP3) ha kaout poltridi... deiziadoù da zont: 16/10/04 e Kemperle (Sal Koad kêr) - 9/12/04 e Roazhon (Salle de la Cité) evit mont e darempred gant ar strollad : Tangi Oillo 06 70 77 28 55 oillo@hotmail.com





sos euzhvil



EMBANNADURIOÙ :

Un dibab eus hor c'hatalog :


Des Dessins et des Mots

LEVRIOU
EVIT PAKAN
SKIANT
HA KAOUT
BUDI...



E gwerzh er stalioù ha dre lizher, resevit hor c'hatalog evit netra !

Kerignan 29380 Banaleg - pgz : 02 98 35 40 56



BANNOÙ-HEOL

priz an tamm : 8,50 €

albom nevez !

140, stradaed Pont-'n-Abad - 29 000 KEMPER - pgz : 02 98 64 58 96 - www.b-heol.com

RHÉSUS

HA GOUZOUT A RIT EO DIFENNET MONT BUANOCH EGET 30KM AN EUR E KÉR?

DIWALLIT OUZH AR SAVENN!!

CHOMT A-SAV!

BOUM

N'EO KET C'HOAZH AN TAOL-MAÑ EM BO ANEZHAN...

HAÑ?

TENZOR AR SANTEZ

Tenzor ar santez ne vefe nemet ur vojenn evit touristed; hervez ma oar an holl a vro. Ha ken simpl'ed eo?

Malo AR MENN

DESACHAN A RA TUD HAG AR GENNERZHOURIEN N'INT KET BET PELL EVIT KOMPREN E C'HELLFENT TENNAÑ GOUNID EGUS SE, EN UR VRO E-LEC'H M'EO DIAES KAVOUT LABOUR UR WECH SERRET STALIOU BRENNILUZ, KEMENT TRA A CHELL BEGAS

TOURISTED A ZO MAT, SETU PERAK EN JEUS BET UNAN SONJ OBER PE-ZHIOU MONEZ KOZH FAOS... GWERZHAN A RA ANEZHO. HA KER! AR RE ALL O DEUS HELLLET... HAG AL LAE, RON NEZ, KELCU PEUS EGUS O RENER?

NE C'HELLO KET MONT KUIT EGUS AR MENEZIOU ARE, ME LAR DEOC'H. HA C'HAN, JONAS, DA C'HORTOZ DONT DIRAK AR JUSTIS, E ALIAN AC'HANOC'H DA ECHUIÑ HO FILM, AR BLIANNA AR GWELLAN... GOUDE E VO UN AFER ALL...

O KINNIG HERVE TRADY, UL LAER ANEZHAN, DINJAN DRES? CIN HAROZ?

HERVE TRADY? KET EVIT PONT, CHEF...

BOH, JONAS, CIN HAROZ ZUR FILM? UR VOJENN M'EO KEN KOMPOZI GOULLO EN AVEL...

MAR PLIJ, KOMISER... HA GELLOUT A RAFEN AMPRESTIÑ AN DELWENNOU A-DENNA STUBIÑ ANEZHO, NA PA VEFE NEMET EVIT UN EUR PE ZIV?

DOUZH AN NOZ, E LETI
AR RE LANCHEG...



WARC'HOAZH E VO NEZ C'HOAZH.
KEN PELL O JEUS GORTOZET AN BELWEN
NOG MA Z INT GOUEST M'CHORTOZ
C'HOAZH...



PROMETET
M'ELUS RENTAN
ANEO BUAN...

ANTRONOZ VINTIN...
N'EZ M KET GANEOC'H,
DIGAREZIT... N'EN EM
BANTAN KET YAC'H...



AR WRIC'NEZ MAEL...
N'HO PEUS KAVET NIETRA.
BROT PENNEK MA'Z OUT.

AR C'HEL C'HOAZH AZE WAR
AN TI GUAL BRAS A WEC'HO
B'HAN G'WEC'HOJ ALL
PERAK... PESERJ L'WAMM?



KAVOUT A RA MAEL DIES SONJAL
EZ EO HERVE C'IL LAER... HA ME
NEZ LIN TAMM...




EN EM GLEVOUT A RAENT MAT.
ABALAMOUR DAR PESKEREZH...

YEAH! AR PIKOU A ZO EN O
C'HEIZ! DA LIAMMAN ANE-
ZHO... LA'RET E VEFE SIFROU
HA LIZHERENNOG...



PELIVAN KOZHTREY/NAG A DUD/N'EO KET/
MARV AN DOURI STELEZH E KREZ-BREZH!
DEOMP DA GAOUT AR RE ALL...

DEUIT DA WELET...
C'IL LIZHER EVIT MAEL A OA
AMAN, LAOSKET GANT HER-
VE, KAZI S'UR PIV MOD
ALL?...



Mae
Mignon
digarez
a guzha
graet m
devezh
kispigant
brudig
c'haloup
Leng'riou
eiruete
pada
oa aze
gant
m chicken
ur mab
eveldout
m em weli
ken, 'donj
r'wotionez
Herve
mignon ke



A! MAEL! DEUIT OUT,
A-BENN AR FIN!...



PE... PETRA
EMAOUT
OCH OBER?

KAVET M'ELUS,
GORTOZ ACHA-
NON AMAN.



PELEC'H EMAN AR
RETER? AMAN.




80- 81...



171... AMAN
E VEFE,
SANSET...

30 MILION A VIGNONED André MORVAN



Istor farsus Yann Bijer
Kurunenn Lady Diana

Dalc'het o deus an holl soñj penaos e oa bet e oa bet riñset prinsez Bro-Saoz, Lady Di, da genver ur wallzarvoud gant ur charr-tan, ur Mercedes.

Un nebeud devezhiou war-lerc'h, e oa bet galvet ivez ar seurez, Mamm Tereza, gant an aotrou Doue. Oadet-bras e oa Mamm Tereza. Setu-hi dirak Sant-Pêr, e toull dor ar baradoz. Ha porzhier ar baradoz da vont outi e-giz-mañ :

-Chwi an hini eo, Mamm Tereza ! Aboae ar c'heit m'emaon war c'hortoz achanoch ! Deuit, memestra, e-barzh baradoz an Aotrou, me ho ped.

-Mant a rin, Sant-Pêr. Met, da gentañ tout, me a fell din kaout war ma fenn ar c'helch aour prometet din, rak labourer em eus ivez evit an Aotrou, ha n'em eus kelch aour ebet ganin war ma fenn.

-Ha p'egit deomp, Sant-Pêr ! Aet out divmer ? Labourat evit an Aotrou 'tefe graet, hervezout ! Ha soñj 'teus ? Pa oa deuet ar jahdarmidi da lakaat o c'hrabanou war Jezus-Krist, d'an nozvezh-se, ha p'he doa ur vaouez diskriet d'ar jahdarmidi, gant he seliou troet ouzhit :

-Hemañ a zo ivez gant Jezus.

Petra 'toa respontet ? Nachañ Jezus 'toa graet, ha dre deir gwech c'hoazh, a-barzh m'en doa kanet ar c'hilhog. Hag e fell dit goude-se, kaout ur gurunenn war da benn ? Biskoazh c'hoazh !

Setu n'eo ket c'hwî lûr, tudou. Lakaet e oa Sant-Pêr trist gant Mamm Tereza. Ne ouie ket petra respont, anezhañ, ken e lavaras, a-benn ar fin :

- Selaout achanon, Mamm Tereza. A-benn warc'hoazh ez in

da c'houlenn ur gurunenn evidoc'h digant an aotrou Doue. Met, da gentañ tout, c'hwî a rank antreal e-barzh ar baradoz.

- A zo mat, neuze. Fiziñs am eus ennoch, Sant-Pêr. Ha Mamm Tereza e-barzh ar baradoz. Kentañ hini em gav ganti e oa Lady Di.

- Aze e oac'h, Prinsez Diana ? a lavar Mamm Tereza. Ha penaos emañ ar bed ganeoc'h ?

- O ! Mamm Tereza, amañ e vez an traoù eus ar c'hentañ tout. N'eus ket da glemm. Setu oc'h deuet ivez, Mamm Tereza.

- Ya, ya, deuet on ivez. Setu hag e oa aze ur gwalldaol evidoc'h ivez, ar gwallzarvoud c'hoarvezet gant ar charr-tan Mercedes.

- Ar Mercedes, ya. Met goût a rit, bez' e rank pep hini mont kuit pa vez deuet an eur. Ne vez ket goulennet digant an dud, goût a rit.

Ha Mamm Tereza sevel he seliou, peogwir ne oa ket gwall vras anezhi, etrezek penn ar briñsez, hag a oa deusouti ur vaouez fonnus ha bras war he botou-lêr o zalonou pik. Ha mantret e chom ar seurez. Sellout a ra deus penn ar briñsez hag e lavar diwar he souezh

- Achanta, Lady Diana, penaos oc'h deuet a-benn da spaout ar pezh a zo war ho penn ?

- Petra 'zo, Mamm Tereza ?

- A beñ ! Sant-Pêr, n'eus ken ur gaouier deusoutañ. Hennezh a glevo bremañ diganin pe me 'wela ! Nac'het en deus reiñ din ur gurunenn henvel ouzh an hini a zo ganeoc'h war ho penn.

- O ! Mamm Tereza gaezh ! An dra-se n'eo ket ur gurunenn. Ha n'on ket deuet a-benn da dennañ anezhi kuit c'hoazh. Ar pezh a wellit aze, rad-stur ar Mercedes n'eo ken, siwazh din.



KEIT VIMP BEV
22, grand rue
29520 LAZ
Pgz : 02 98 26 87 12
Pir : 02 98 26 80 38
keitvimp-bev@wanadoo.fr

Moulet gant :
QUESTELIO
505 st. Julien de la Graviere
BP 30708 BREST cedex 02

Renner ar gazetenn
Yann-Fañch JACO

Tresadenn ar golo :
LOL

Skoazellerien :
Patrice MARQUAND
Yann GUICHETEAU

Niv. CPPAP : 1005 G 840 75

DARIÛS

Gilles SANGLA



DA BEP OAD E OTO

R. LE DORVEN



R. LE DORVEN